

GUEBZ NE VEZ

*VAR sujet eur Zoudard, eus a arme an Afriq,
assassinet a dottiou countel gant e dud.*

Var ton : Guerz ar Plac'h libertin.

PEUR eta, va Doue, eo'h ellin recita
Eun dra a gonsolant evit tud ar vrô-mâ!
Rencout a rân adare disclêrya dirac an oll
Un torset ifernus carguet eus a horrol.

Mes pa deu va speret gant eves da kontempl,
E sonch din va recit a zervicho d'exempl;
Rac o tont da zisclêria torfejou qen horrerus,
E santot peguer douç eo carout ar vertus.

Fanch-Job Richard a voe e Bis-Feunteunganet;
Abaoue bianic ne voa qen occupet
Nemet d'en em gundai gant enor ha lealdet,
Vit na vijé biqa en nep tra tamallet.

Yaouanq en em angach e guis eur volontier,
Hac e parti qerqent evit arme Alger,
Epad amzer e zervich, atao voe soudard vaillant,
Ha caret gant an oll ebars er regimant.

P'oe êchu e gonge, e listroas en Franc,
Carguet demeus a joa, ha gant an esperanc

D'ober un affer benac, evit un devez da zent
Eurus, dre honestis : var ze e rē e gont.

Ramplaci a eure mab un den piovidic,
A rē boneur e dud, bac a voa mab unic.

Contet e voe da Richard eur som bras eus a
arc'hant

Neuze qent partial evit e regimant.

Mes, furroc'h eguet calz, ebars ty ur banquer
E tebos e arc'hant qent distrei da Alger,
Rac sonjal' rē gant rēson eo suffisant d'eur zou-
dard

E bae evit beva hac evit monti gard.

Antreal a eure er Chasserienn d'Afriq ;
Eur zoudard brao a rē hac un den manisiq.
Gant courach e combatas e Constantin, en Oran,
Hac er c'harnach terrubl demeus a Mazagran.

Selaouit oll ervad, me ho ped, Bretonet,
Un dra ha me zo sur ho rento estonet :
Cant tri varnuguent harros o deus eno pulluhet
Gant eur gourach ardant daouzez mil Arabet.

Decoret voe Richard eus ar Groas a Enor ;
E gonge en devoe, bac e treuzas ar mor.
Qemer eure e arc'hant hac ouspen, an interest,
Hac e ya en e hent joaüs bras, prim ha prest.

Antren' ra'n ty e c'hoar, pini voa demezet,
Hac e poq dei gant joa hac ive d'e fried :
« Monet a rān, emezān, da dv ya zad da loja ;
Mes n'en em baouin qet qēu a vezò varc'hoa.
» Mé laqai prepari un dijuni ervad,

• Ordren a reomp ma vo gant an oll enoret
• Evel m'en deus meritet en amzer dremenet. »
Neuze prest en em rentjot en ilis cathedral,
E pini'n Autrou Escop en em gavas ractal;
Au Te Deum solannel voe canet a galon
Vit delivranç evurus ar vertuzus Person.

Qerqent neuze en em silap var bennou'e
zaoulia,

Dirac an tabernacl sacr, chommanç e vestr divin:
O, va Zalvert emezan, demeus a lein ho tron
Recevit va zrugarez eus a greiz va c'halon.

Distrei a eure ractal eus an asistantet,
Ha gant ur voez truezus hac ur galon mantré:
Guelit da betra e tenn an infam calomni!
Oh! christenien, diouallit ouz eur c'hrim qen
impi.

Mar tiguesse dêc'h un deiz beza calomni;
Na dleit en em vengi diouz hoc'h enemiet
Nemet dre eur gundu vad ha bepret didamal;
Se eo ar güella moyen enep an teodou fall.

Na dleit qet caout estranch e vec'h calomni:
Piou eo, m'er goulen ouzoc'h, avichou na ve qet?
Se na dle qet oc'h eston, christenien vertuzus;
Ar judevien gueachal n'espérnjont qet Jesus!

FIN.

A. L.

AN INNOCĀNC ANAVEZET,

*Pe delivranç PERSON VAL-SANT-VIÇANT, accuset
faussamant da veza bet assassinet BENBAD REDON,
Adjoent ar Mear.*

Var ton : *Guerz an Autrou Homo.*

POBL mad eus Vreiz-Izel, selaouit, me ho ped,
Penos ar speret a zo avichou faziet :
Credit ferm ne zeus nemeth hon Autrou Souveren
A bini ar jujamant na fazi birviqen.

An aotrou Marcellin voa Person Val-Sant-Viçant,

Un den eus an honesta, devot bras ha prudant;
Na sönjas qet sur biscoas e teujet d'en tamal,
Na d'en accusi biqen eus a netra a fall.

Gouézit ersfat, christenien, e zeo un dra impi
Implich, e nep seurt fêçon, an infam calomni :
Mar trompler re alies tud savant eus ar bed,
Bezomp certen birviqen Doue na vo tromplet.

Neo qet avoalc'b, gant icomzou, seblanti
vertuzus ;

Ret eo demp, e peb amzer, beza mad, generus.
Mar bezomp calomniet, lacomp bon esperanç
En Doue a vadelez : én vo hon recompanç.

Ar Person en doa choaset' vit e vrassa mignon
Qenta adjoent eus ar mér, leal vel eur Breton,
E ly Redon e vije ar Person alies,

• E pini vimp hor pemp, c'houi, me hon mam,
hon tad;

• En eur eva eur banne, me rai n'em anavezout,
• Hac ar veren en dorn ni en em boqo tout.

Qerqent e ty e dad e zê en em rentet,
Hac e c'houlen coania ha ma vije lojet.

Allas! e dad nac e vam n'o devoe qet nep douetanç
E lojent o buguel, objet o esperanç!

Ar vam e doa guelet en devoa calz arc'hant,
Ha pa zant voa cousket, e red incontinant
Da furchal sac'h e mab paour, ma vel an aour
o vrilla,

Hac eyit er c'havout e sonch dont d'en laza.

An drouc-speret e c'hass d'e fried da bropos
Etre diou variqen er c'hao d'ober eur fôs.
An tad, allas! a gonsant; arvam gant arrach cruel
A vassacr e buguel eus a doliou countel!...

Vardro eiz heur anter ec'h antreas en ty
Ar yerc'h hac ar mab-caer evit an dijuni.

Allas! diouc'h-tu e veljont ar c'hrim voa bet
coumetlet,

Hac e scrisjont spontus vel tud disesperet.

Ar justiç a deuas da gonstati ar c'hrim;
Cavet e voe souden corf ar paour qèz victim;
Dastumet e voe ractal an daou autor an torfet,
Hac d'ar maro e zint bet o daou condaonet.

Ar vam criminal-se er prison a lennas
Ebars levriou santel, re divezat, sivoas!
Hac e cavas calz matier da zont da reflechissa

Hac an teodou miliguet a sonch gallagries.

Lavaret a rêt en cus e yê'n autrou Person,
Var digare cozeal, da velet greg Redon ;
Mes ar Pastor vertuzns n'en devoa nep souci
Deus an têodou aër-viber, daoust d'o oll ca-
lomni.

O veza êt da zicour da laza un tan-goall,
E pelec'h e laboure gant nerz dreist-ordinal,
Ean treust ha deu da derri hac e coez d'an
douar ;

Mil boan en d'oe o sevel, dijoentret voa e c'har.

Ma vije difficulte ebars er famillou,
Ar Person o arrange gant e vad cusulioù ;
En amzeriou a glénved, a chagrin, a vizer,
E cavet soulajamant ebars ar presbyter.

Anfin, en den Doue-se, vel an Autrou Lhostis,
Person eus a Bloumillau, den zantel a Ilis,
A laqè e oll boneur da zoulach ar beorien,
Pere en vénere oll, vel tad d'ar gristenien.

Mes ar c'halomni infam, dign eus a Velze-
buth,

Gant e binim infernal a laqa rên ar brud
E zeo ar bêleg santel, ar vertuzus Person,
En deveus assassinet e vignon bras Redon.

Laqet e zeo er prison, qerqent neuze ractal,
Ha condæonet d'ar maro, evel güir grriminal,
An oll a voa en glac'har, disesperet dre'r vro.
Doue just ! ra deuy ho prec'h d'en diffram
d'ar maro.

Interpellet da zisclêry. hac én n'en deva ~~et~~
Un dra benac d'observi var ar varn prononcet,
An den just! var e galon a bos e zorn neuze,
Hac en e za e lavar, o sellet ouz an èe :

- « Doue just ! Doue puissant ! c'houi vel forc
va c'halon ;
- » C'houi voar ha me a verit va c'hondaonation !
- » Mes, mar deo ret din souffri un injust chati-
mant,
- » Eveldoc'b, Salver Jesus, me varvo innoçant.
Daou-uguent devez goudez voe ar chaffaud
savet.

Var blacen Clermont, evit ma vije dibennet ;
Un heur qent mervel e voe arrêtet ur muntrer;
Hac a anzao innoçanç an Autrou Person qer.

Ar barner a red leun c'hoez var blacen vras
Clermont,

Pelec'h voa eur bobl immanç, carguet oll eus
a spont ;

Ar bourreo voa o prepar e instrument fatal,
Hac a yê da guemeret ar c'hès Person racia.

Bannerrien an tribunal diouc'h-tu zo' n'em
gavet,

Ha Procurol ar Roue, va ar chaffaut pignet,
Hac eno, a vouez huel, ha gant solennite,
E prononç, leun a zaelou, ar gomzou-mâ neuze:
» Dirac Doue hac an dud, ni amâ a broclam
» E zeo an Autrou Person demeus ar c'hrim
diylam :

Var e c'hrim horrerus er moment diveza.

Deus a fonç e c'hachot e ɔrie gant estlam :

' Me zo ur vuntrerez, un horrol da bep mam...

Lazet e meüs va mab quer evit cavet e arc'hant!

Me dle paea va c'hrim dre ur c'hris chatimant.

O arc'haat miliguel! penn-caus demeus va c'hrim.

Te rás e peb amzer, alias! meur a victim.

Perac na deuas ractal an douar vit va lönqat

Er moment ma tuis va mab da gountellat !...

Adieu, va merc'ho paour, ha va mab caer ive;

Adieu, va oll guerent; me renq meravel hirie !

Oh! me ho ped da nonpas dont da scuill an infamdet

Var va memor biqeo, na ne vin execret.

Pardon, ô va Doue ! pardon, ô va mab quer !

Pardon, va cherent oll! pardon, tud va c'halter!

Justeo din-me souffrir hirio ur suppliç zo quer garo:

Pedit oll evidon... mont a ran d'ar maro.

C'houi oll tud ar c'hanton, spicial yaouanqis,

A ya da veza test demeus va goal suppliç,

Sellit va fin qen infam, carit atao ar vertuz,

Hac e vezog bepret güir vugale Jesus.

Rei a ran va c'horf paour en chatimant hirie,

Va ene a roan, o crena, da Zoue :

Ra deurvezo e receo ebars en e garante,

Ha græc m'er possedo hed an eternite.